

Anaïgou.

Tri den yaouanq deus ar chontre
 Zo ed o zri dan arme
 O zri e hin(t) chagrinet
 Balamour dho mestrezet
 A zo er gher chomet

Ar yaouanka deus an tri ze
 An n'euse goulennet e gonje :
 Konje otrou Kabiten, konje a c'ho(u)lennan
 Da vond da velet va mestrez
 A meus klevet zo klan.

Var an trujou pa he erruet
 Bonjour an deveus lavaret
 ha bonjour ha dibonjour,
 Bonjour a lavaran
 Pelec'h man Anaïgou
 a meus klevet zo klan.

he c'hoar Mary var leur an ty
 ag a respontas eviti :
 Anaïgou a zo maro
 maro ag interet
 he ine zo er barados
 ag e c'horf er veret

mar de maro Anaïgou evel ma leveret
 Pourchasset dime plinchou da ober ma archet
 mar de maro Anaïgou neket maro gant joa
 he heo gant kun de amour
 eun amour *bravo & (1) doa.*

me ne don ket maro
 ken neubeut decedet
 varc'hoas me vo demeet

antronos eureujet
Pe e vanko ar veleïen
en Paros Langoënet

Anaïc Cozic, 9bre 1850.

(1) D'abord : e, corrigé en : a. Peut-être faudrait-il lire bras (qui s'accorderait mieux avec le sens) au lieu de brao.